

# KANNAOIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 75 Meurzh - Ebrel 2012 Priz : 3€

## An Tiegezh da zentañ !

Gant 65vet deiz-ha-bloaz Emglev An Tiegezhioù en em gavomp gant birvilh ar mouezhiadegoù da envel adarre ur roue evit Bro-C'hall, evel bep pemp bloaz. Er c'hentañ tro ez eus bet tud o c'hervel da chom hep mouezhiañ da ziskouez o diskred war an tebet demokratiezh a ren e Frañs. Padal, an Iliz a lavar deomp kemer perzh er c'hoari...logod-se, met piv a daol evezh c'hoazh ouzh kelennadurezh ar Bibion en amzer-hiziv ? Seul izeloc'h niver ar vouezhierion, seul wanoc'h e vefe ar galloud e Pariz eme tud 'zo en Emsav. Hogen, ma c'hoarvezfe darvoudoù a rofe an dro deomp da c'hounid frankiz evit hor bro, daoust hag eñ ez vefemp prest evit an « emsavadeg », evel ma c'houlenn AL LANV (niv. 126) ? Ne vefemp ket prest. Gwall nec'hus eo saviad emsav ar brezhoneg hag hini an tiegezhioù.

Diwar-benn ensavadur an Tiegezh ez eo prest Hollande da anavezout a-berzh ar Stad C'hall ar gwir "da zimeziñ" d'ar c'houbladoù heñvelrev ha da advabañ bugale ivez. Paour kaezh bugale ! Evel-se ez a war-raok ar mennad da ziverkañ diouzh al lezennoù gall kement sujegezh ouzh al lezenn naturel. Lezenn ar muiañ niver an hini a gont, hini « *Bolontez Jeneral* » o « *Diskleriadur eus Gwirioù Mab-Den* », hep doujañ tamm ebet ken ouzh pezh ez eo an den, a-benn ar fin, a zo dindan sklavelezh ar pec'hed. Ar wirionez-se a vez nac'het gant an "dieubidigezh revel" ha divezel dre vras. Seurt kevredigezh ne bado ket ken, moarvat, met da c'hortoz e koust kêr d'hol lâr. Ur gevredigezh na zouj ket ouzh buhezhioù dizifenn ar vabiged e kof o mammoù, ouzh ar gozhidi a vo sikouret « *da guitaat ar vuhez hep diwaskañ poanioù* », ouzh ensavadur an tiegezh, tad, mamm ha bugale, sellet evel un divalav a

vonarkiezh vihan dieub, ouzh ar gwir da dreuzkas e beadra sevenadurel, broadel ha relijiel d'e vugale, ouzh ar frankiz da zisteurel ar rolloù-kelenn eus an Deskadurezh-C'hall dizoue ha keñverelour, ur gevredigezh a seurt-se, an hini a ro meuleudi dezhi, muioc'h pe nebeutoc'h an holl bolitikerion c'hall<sup>1</sup>, seurt kevredigezh n'eo ket an hini a fell deomp kaout e Breizh, nann, met a c'hell ober kalz a zistruj a-raok mont hec'h-unan da get o kas Breizh ganti. Ur gevredigezh a lazhe bugale ne c'hell ket padout. Salv ma kavimp-ni, da c'hortoz, an tu da badout ha ma chomo Breizh en he sav, ma chomo eta ivez an Iliz en he sav e Breizh, pa darzho ar patrom-kevredigezh gall.

### Manifestadeg Kemper

Manifestadeg Kemper an 31 a viz Meurzh he deus diskouezet ez eo gouest an emsav da vodañ ouzhpenn 10.000 a dud da bouezañ war an tu kleiz a-raok an dilennadeg vras, met gwelout a ra mat hon enebourion pegen bresk eo hor stal, pa dremen F. Hollande al lost dre c'henou an dud o lavarout ez eo a-du gant adunvaniezh Breizh "*gant ma vo an holl dilennidi a-du*" ! Gwelet ez eus bet « ur brosesion vut ». Ne oa na kanaouenn, na trouz, na luganoù, war bouez nebeut-tre. Jentil-tre e oamp, seven meurbet. Ne santed ket spered un emsavadeg o c'hoiñ, nann. Kentoc'h e oa disouezhet an dud, abaf, tost da vat, deuet da zifenn un dra bennak ha da c'houlenn traoù all, evel sinadur ar Garta, ur pal a hiraezher dezhañ abaoe keit-all, hag a seblant diziraezus e gwirionez d'ar braz ac'hanomp.

<sup>1</sup> "Politikerien c'hall" ha n'eo ket "Politikourion c'hall". An termen kentañ a zo dimegañsusoc'h un disterañ pa n'eus ket ennañ al lostgerioù yaloc'h : -our ha -ion.

Daoust hag eñ e talvez manifestiñ da c'houlenn sinadur ar Garta ? Manifestiñ ur wech ouzhpenn, evel evit unvaniezh bro Naoned ouzh peurrest Breizh ? Ya, moarvat : evit chom bev.

### **Paotred ar gallaouegoù**

Gwelet o deus ivez ar bolitikerien, ha Kemperiz, oristaled ar gallaouegoù, izel-tre an niver anezho e gwirionez hogen gant gitonioù ledan hag o kanañ en engroez mut, ha treuzwisket lod anezho. A vloaz da vloaz e kresk o levezon oc'h en em harpañ war emsav ar brezhoneg a vije miret nemet evit Breizh Izel, ha Breizh-uhel evit ar gallaouegoù. War an hent kozh etre Sant Mewen-Veur ha Ploermael, a stage gwechall ar gêr-se ouzh eskopti Sant Maloù, e vezer souezhet o welout panneloù galleg-brezhoneg a greiz-holl pa 'z aer tre er Mor-Bihan, e Maoron. Pa soñjer mat e verk mat ar panneloù-se ez eo aet da netra ar gallaouegoù, zoken er pastell-bro-se, ha setu holl.

Ar brezhoneg a zo eta, da vat yezh ar Vro nevez a zo da ziazezañ el ledenez-mañ, er reter kenkoulz hag er c'hornôg, ur vro gristen hec'h awen diwar un istor kristen, tonket dezhi erlerc'hiañ ur stad estren, andoueat ha mac'hom.

Den ebet ne gred diskleriañ sklaer n'eo ket par o gallaouegoù bruzhunet d'ar brezhoneg. N'eo ket *politically correct*, met ret eo diskleriañ ouzhpenn e ra gaou paotred ha merc'hed arloupet ar gallaouegoù ouzh yezh wirion Breizh. Etre ar brezhoneg hag ar galleg an hini eo emañ ar gwir gevezerezh paz eo hor yezh evidomp benveg un danvez kevredigezh nevez maz eo an emsav an egin anezhi. Er c'hontrol, ar galleg a zo o tistrujañ hor pivelezh hag a vroud emsavig ar gallaouegoù da lakaat mesk e spered an dud. Gwelet ez eus bet zoken e manifestadeg Kemper tud eus skol Diwan Kistreberzh o reiñ paperennoù da c'houlenn arc'hant hag a vrude ar fed ma vez graet "gallaoueg" ganto.

### **Goulennoù**

Dre vras e seblante din e oan o vanifestiñ gant ur sindikad, en abeg da interestoù da zifenn, ma vefe dalc'hed d'ar skoziadoù a resever, met hep gred, evel mevelion dirak o mistri a-benn ar fin. Keuz am eus da rankout skrivañ kement-se : en un hent dall emamp. N'eo ket evel-se e vo roet un dazont da Vreizh na d'ar brezhoneg. Peseurt diabell-weled hon eus ? N'eo ket gant ar mouezhiadegoù e vo kavet un diskoulm d'hor c'hudennoù. C'hoari politikerien Vro-C'hall a vo atav kontrol deomp : ne c'hellomp kontañ ha

ne rankomp kontañ nemet warnomp hon-unan (ha gras Doue !). Ar gudenn eo n'eo ket kenurzhiat mat an Emsav. Kevre Breizh a rankfe en em zizober diouzh an aozadurioù gallek ha gallaouek ha mont en dro e brezhoneg evit e vuhez mont-en-dro diabarzh ha dreist-holl renerezh ar framm-se. Rak petra a c'heller gortoz a vad evit ar yezh digant ur framm a seurt-se, galleg hag o vignañ Eva (liv gwad an dibennerez gant he lunedoù), ar paotr Bayrou dic'halloud ha dreist-holl Paotred tri fik ar PSF, sec'hedet a c'halloud, prest da brometiñ kalz ha da reiñ bruzhunajoù hepken da gaout peoc'h betek an dro a zeu ??? Pet kevredigezh a-hent-all e Breizh a ya en-dro e brezhoneg en o buhez mont-en-dro diabarzh ? Ha p'emañ ar galleg trec'h en hor frammoù e c'houlennomp arc'hant pe skoazell evit ur yezh ha na reomp ket atav ganti daoust ma c'hellomp. N'eo ket gwall sirius. Ha petra a reomp-ni, bemdez-Doue, n'eo ket evit ar brezhoneg, met E brezhoneg ? Ha pet emsaver a nac'h komz galleg, pe da vihanañ a ra gantañ divezh e pep lec'h hag e pep degouezh ? Alies e vez seurt emzalc'hioù efedusoc'h a se da lakaat an dud da sevel « a-du », da gavout mat hag a-bouez derc'hel ha diorren ar gevredigezh vrezhonek. E dibenn an niverenn-mañ ez eus ur roll eus oberiantizoù m'emañ EAT perzhiek enno, met kalz re nebeut a labourerion ez eus : penaos 'ta kas hon erv da benn pa n'eus ket a-walc'h a emsaverion gredus a-walc'h da ouestlañ amzer, strivoù hag arc'hant ? Hor stourm n'eo ket un hobby, un dra sirius ez eo.

### **C'hwitadenn an tri rouedad-kelenn**

Rankout a rafe ivez an Emsav plediñ gant un afer tabou all, kalz gwashoc'h eget hini ar gallaouegoù, afer c'hwitadenn an deskadurezh divyezhek e Breizh. Daou dre gant eus ur bloaziad bugale d'ar muiañ a dremen dre unan eus an tri rouedad-kelenn. 20 % e parrezioù 'zo. N'eo ket tra-walc'h. Ar gwashañ n'emañ ket eno c'hoazh : pet bugel, diwar ar 14000 -se, a ra gant ar yezh er gêr ? Ha pet diwar ar re-se a ra gant ar yezh pa 'z a ouzh e vamm pe ouzh e dad. Ha pet anezho a ra ganti pa vez gant e vreudeur ha c'hoarezed o c'hoari ?... Pet « skol divyezhek » o deus skolidi a ra gant ar yezh war ar porzhskol e gwirionez ? Piv a gav dezhañ pe dezhi ez eus tu da zerc'hel ur yezh ha na vez ket komzet er gêr ? Piv a gav dezhañ ez eo tra-walc'h ar bruzhun a vez skignet war ar skinwel pe ar stlabez brezhoneg a glever re alies war ar skingomz ? Piv a ziskulio ar sifroù evel ma 'z int a-zivout ar vugale bet skoliataet e Diwan abaoe

36 bloaz ? Pet anezho a ra gant ar yezh pa zeuont en oad ? Perak ez eus ken nebeut anezho o kemer krog er stourm d'o zro da heul o zud ? Pet anezho a zimez gant unan a oar ar yezh evelto ? Nebeut-nebeut ez eus anezho, ha ne ya ket o niver war gresk kement-se daoust da gresk souezhus ar c'helenn divyezhek abaoe 1976<sup>2</sup>. Sur a-walc'h ez eus tu da gavout peragoù. En amzer hiziv ne zimez mui an dud peurvuiañ. Sevel tiegezh zoken ha kaout bugale da heul n'int ket palioù ken hoalus-se evit leuniañ buhez unan ken, a lavarere dre holl dre yoc'h-stlenn. Alies e tremenont o buhez pell diouzh lec'h o ganedigezh, ha pell-mat zoken, er-maez eus ar vro. Pet bugel a-douez ar 14000 a zo er rouedadoù divyezhek ar bloaz-mañ a gavo ur brezhoneger pe ur vrezhoneger da sevel o ziegezh ?

### Emglev An Tiegezhioù

Evit sikour ar familhoù da gas da benn o mennad da dreuzkas ar yezh d'o bugale e oa bet savet EAT gant Yann Kerlann hag Alan al Louarn e 1947. Evit aesaat al liammoù a vignoniezh etre ar familhoù mennet da ren o buhez e brezhoneg. Ha diwar-se, pezh a zo hollbouezus, kinnig d'ar pried pe d'ar bried ha n'int ket stourmerien o-unan kement-se, ha d'ar vugale, ur meni kevredigezh, ur rouedad darempredoù a vignoniezh e brezhoneg, e mor ar galleg. Hon Emglev a zo un Emglev war ar pep pouezusañ : ar gwir o deus ar familhoù da sevel o bugale hervez o mennadoù. Da heul ez eus ivez talvoudoù all evel ar stourm da wareziñ ensavadur lezennel an Tiegezh, ar stourm « *Pro-life* », mirout ar Sul, ar frankiz-skoliata, ha poentoù all a-bouez a seurt-se. Un Emglev a spered broadelour ez eo dre ma roomp ur ster politikel d'ar stourm evit ar yezh : fellout a ra deomp lakaat Breizh da vevañ dizalc'h a drugarez d'he benveg yezhel piaouel, ar brezhoneg. Erfin ez eo lik hor c'hevredigezh paz n'eo ket renet gant ur beleg hag e tegemer en he c'hreiz tud ha n'int ket kristenien hogen a zo holl a-du gant kelennadurezh an Iliz war boent an divezouriezh hag an talvoudoù a ya da heul al lezenn naturel a zifenn.

Dalc'hmat ez eo bet dinerzh EAT. En « *ur bed 'giz pa vije* » e treuzvev, a lavarfe Françoise

<sup>2</sup> Gant ar saozneg er skolioù-mamm a ziskouez e fri bremañ hag a zo didec'hus p'eo bet lakaet er rolloù-kelenn ez eus ur riskl bras da welout ur bern tiegezhioù pellaat diouzh an tri rouedad-kelenn galleg-brezhoneg, dre ma klaskont dreist-holl kelennouriezh an divyezhegezh ha n'eo ket ar brezhoneg evitañ e-unan.

Morvan, diempret penn-da-benn ha muioc'h-mui diouzh ar boblañs e Breizh a feur ma vez divrezhonekaet, divreizhekaet ha digristenaet. War an hevelep tro ez eo diempret ivez EAT diouzh ar bras eus emsav ar brezhoneg dre ma pella hemañ muioc'h mui diouzh ar spered broadelour ha kristen a rene da skouer e 1958 pa voe diazezet **Kuzul ar Brezhoneg**, ha lakaet en e benn ur beleg, Klerg, person Bulien ha rener « **Barr-Heol war feiz-ha-Breizh** ».

D'ar poent-hont ne oa ket bet c'hoazh al lanv bras diwar emsav 1968 a roio an dro da sevel ar **skolioù Diwan** kentañ e 1976. Neuze 'ta, ar rummad-se a savas ar skolioù Diwan a voe efedus-tre war ar poent-se, hogen na sante ket evel o diaraogerien ezhomm ur framm piaouel evit an tiegezhioù brezhonek. Dreist-holl moarvat ne felle ket dezho emezelañ ouzh ur framm manet kristen dre m'o doa distaolet er pleustr an divezouriezh hengounel, pergen dre implij ar bilulenn hilastaliñ a vroudas an dirollerezh revel ha dizurzhioù a-bep seurt adalek ar bloavezhioù-se, ha gwazh-ouzh-gwazh betek hiziv, pergen gant lezenn ar sioc'hanadurioù e 1975, o vont er par-se penna-da-benn « a-du gant red an dour », a-du er pleustr gant ar gevredigezh c'hall frankizour-kleizelour. Da heul n'he deus ar vroadelouriezh vrezhon hengounel ster ebet evito dre ma ne fell ket dezho kemm doare ar gevredigezh arnevez a-benn ar fin, a ya en-dro e galleg. Daoust d'an dichal e kendalc'h EAT da zrestbevañ, lusket dreist-holl gant preder Youenn Olier hag e sell lemm war an darvoudoù hag emdroadur ar bed dre vras. Abalamour da se e oa bet dalc'het gant talbenn e gelaouenn « **Imbourc'h** » pa oa bet savet Kannadig Emglev An Tiegezhioù, « **Kannadig Imbourc'h** » : da verkañ mat e fell deomp, daoust da enkadenn an tiegezhioù brezhonek kristen, kenderc'hel gant hor mennad da ober eus ar brezhoneg yezh hon tiegezhioù, ha pergen yezh hor speredoù gwitibunan. Imbourc'hañ : klask ar wirionez war bep tachenn, sellout a-gevret ouzh ar bed gant ur savboent brezhon ha kristen, eskemm war gement-se holl gant ur spered a vignoniezh hag a zoujañs evit an dud, ha kemer perzh e stourm an emsav hag e istor kempred an Denelezh oc'h enebañ war hon tachenn, hini emsav ar brezhoneg, ouzh sevenadur an Ankoù.

M'henn anzav : c'hwezh ar c'hozh a zo eta gant EAT. Dreist-holl dre ma n'eo ket deuet a-benn morse da duta kalz a dud, pa oa kristenion wirion, ar re a rae war-dro : Alan Al Louarn,

Youenn Olier, Job Morvan, Annaig Renault hag all. **Annaig Renault**, nevez aet da Anaon, Doue d'he fardono, he doa klasket dre EAT kelaouiñ an izili diwar-benn doareoù hilastaliñ naturel a glot gant kelennadurezh an Iliz da skouer. Met dre ma oant gounezet gant ar spered kleizelour – e devoud a-enep kelennadurezh hengounel an Iliz ha pergen kelc'helenn « **Humanae Vitae** » bet moulet gant Imbourc'h - ne dostaas ket ar familhoù nevez, se hon eus merket dija, zoken ar re a voe diazezet gant bugale diazezerien EAT. Gant donedigezh **Youenn Souffes-Despré** e voe lakaet uhel-tre banniel katologiezh ar gevredigezh ha d'e heul e voe lakaet sklaer en Dezvadoù nevez e Rostren er bloaz 2000 gant ar mellad 3 : « *Ar gevredigezh a zegemer kelennadurezh an Iliz katolik a zo e Roma* ». Netra splannoc'h. Treut eo an eostad hogen n'eo ket difrouezh a-grenn, daoust m'eo kalz disteroc'h eget ar pezh a c'hortoze Roparz Hemon pa rae anv eus EAT en e gelaouenn « **Ar Bed Keltiek** ». D'an ampoent ne oa ket 60 tiegezh o klask sevel na pa ve ken nemet un tammig bihan o bugale e brezhoneg. Daou emgav a veze aozet bep bloaz, met e gwirionez n'eus nemet e Roazhon, en-dro d'an Oferenn vrezhonek e oa buhezek ar gevredigezh. E 1969, gant digoradur « **Oaled sant Erwan** » e Brest gant ar vreudeur Souffes-Despré, gant emled an oferenoù brezhonek, gant embannadur berr-bad ar gelaouenn **Ololê, Wanig ha Wenig** hag heuliadoù miz mae 1968 e voe un tammig muioc'h a lañs, a c'heller muzuliañ o lenn ar rentaoù-kont a veze embannet gant **Al Liamm**. Buan avat e voe eilpennet an traoù en emsav gant ar rummad nevez hag e kavas gwelloc'h izili EAT sevel o c'hamp dezho o-unan, unan kristen, eget kenderc'hel gant hini **KEAV**, na oa ket mui a spered kristen. Adalek neuze, e tro

1976, e voe kampoù e Kistinid, aozet gant **Kristenion Breizh** hag EAT.

E 1988 e teuas a-benn Yann Talbot da aozañ « Kampoù Katekiz » dindan talbenn ur gevredigezh a ziforc'h, « **Breuriezh Sant Erwan** » e Rostren. Neuze e chomas a-sav kampoù Kistinid hag EAT ne oa oberiant nemet e Brest gant « Oaled Sant Erwan ». E derou ar bloavezhioù 2000 e sammas EAT mererezh embannadurioù Imbourc'h ha Kannadig Imbourc'h. Daoust d'an enkadennoù niverus ha d'an avel a-benn a gav EAT war e hent, e talc'h da glask heuliañ gant fealded linenn istorel Breizh : evit ur Vreizh vrezhonek a spered kristen e stourmomp, o c'houzout ne c'hell ket seurt stourmad bezañ gounezet hep ur rouedad kreñv a diegezhioù, gant ur yezh diorroet mat, gant bugale niverus leun a esperañs evit an amzer dazont. Pezh a fell din lavarout amañ da glozañ ar pennad-mañ eo en deus ezhomm Emsav ar brezhoneg ac'hanomp-ni tiegezhioù kristen, da adkavout ar goanag evit dazont hor bro, ar blijadur o skoulmañ darempredoù etre an tiegezhioù hag ar gredenn ez eo e gwirionez a-bouez-bras ar stourm a renomp evit an Denezelz hec'h-unan.

Liammet eo dazont EAT ouzh hini an Emsav, forzh penaos. Gantañ e ranko talañ ouzh an darvoudoù a seblant bezañ war-nes gwashaat er bloavezhioù da zont. Ur ger diwezhañ da echuiñ, hini Souffes : « *An Tiegezh da gentañ !* ». Netra priziusec'h en hor buhez pemdez. Ennomp eo bet fiziet gant Doue. Diwar buhez-pemdez hon Tiegezhioù e krouomp Breizh da zont. Tostaomp an eil diouzh ar re all d'en em sikour !

**T. Gwilhmod**, kadoriad

## Galloud an Arc'hant 2/3

### Ar pod-pri a-enep d'ar pod-houarn

Adalek an derou ez eo bet Istor Stadoù Unanet Amerika un hir a vrezel ferv etre ar galloud politikel ha galloud ar vankerion, ha bep tro ez eo aet ar maout gant ar vankerion, pezh a zo devoudet war ur vestroni fonngenezel<sup>3</sup> eus ar gellidourion war ar bed a-bezh. Kroget en devoa an emgann a-raok Diskleriadur an Dizalc'hiezh e 1776, pa oa deuet a-benn bankerion *City of*

<sup>3</sup> Fonngenezel : *exponentiel*.

*London* da ober mouezhiañ gant ar gouarnamant saoz ul lezenn a verze ouzh trizek trevadenn Amerika da grouiñ ur moneiz lec'hel, *the Colonial Script*, ha da arverañ hepken evit o eskemmoù moneiz aour hag arc'hant ar vankerion. Evel ma oa ret talañ kampi evit kaout ar moneiz-se e teue dre ret da vezañ un dle eus an trevadennoù. Setu perak, da zeiz Diskleriadur Dizalc'hiezh ar Stad nevez, e voe enskrivet gant an Tadoù Diazezerion er Vonreizh amerikan, sinet e Philadelphia e 1787, en e bennad 1,

kevrenn 8 § 5, *ez eo d'ar C'huntell<sup>4</sup> amerikan ma perzheno<sup>5</sup> ar gwir da skeiñ arc'hant ha da reoliañ e dalvoudegezh.*

Ken kendrec'het e oa Thomas Jefferson gant roll gwallsiek ar vankerion etrevroadel ma skrivas : *“Krediñ a ran ez eo an ensavadurioù bankel dañjerusoc'h evit hor frankizioù eget armeoù bras, darev d'an emgann. Mar bez aotreet un deiz gant ar bobl amerikan e vije reoliet war he moneiz gant arc'hantioù prevez, ar bankoù hag an holl ensavadurioù a vleunio en-dro dezho a ziberc'henno an dud eus pep perc'hentiez, da gentañ dre ar monc'hwezh, da c'houde dre an enkil<sup>6</sup> betek an deiz ma tihuno o bugale hep ti na toenn, war an douar bet gounezet gant o zud”.* Thomas Jefferson (1802). Ha setu penaos en devoa diouganet Th. Jefferson, daou gantved 'zo, enkadenn ar *subprimes* he deus taolet milieroù a Amerikaned er-maez eus o ziez.

Hogen, ne voe ket anzavet gant ar vankerion e oant trec'het. Kavout a rejont skoazellerion er gouarnamant nevez, evel Alexander Hamilton, Sekretour an Teñzor, hag ar Prezidant George Washington e-unan. E 1791 e tizhjont da gaout ar gwir da grouiñ ur bank anvet, dre gammarver, *Bank ar Stadoù Unanet*, e doare da reiñ da grediñ e oa ur bank eus ar Stad kreiz, pa ne oa nemet ur bank prevez, perc'hentiez e gevranneion<sup>7</sup>. Evit ugent vloaz e tizhas ar bank-se kaout ar brient da vonañ moneiz-dle ar stad nevez.

20 vloaz war-lerc'h, avat, pa fellas d'ar Prezidant Jackson lakaat un termen d'ar gwir dreistmuzul-se, mont er-maez eus ar moneiz-dle ha dont en-dro d'ar gwir enskrivet e pennad 1 ar Vonreizh, ar vankerion saoz, ambilhet gant Nathan Rothschild, a enaouas, war amrizh digarezioù kenwerzhel – taosoù war an te – ha merdeadurel – reolerezh al listri - ur brezel etre Bro-Saoz hag he zrevadennoù-kozh, hag e lakajont en emgann o holl c'halloudegezh kellidel a-benn degas en-dro ar Stad nevez e renk un drevadenn. *“Un toull-laeron ez oc'h, un toull-naeron-wiber, en devoa garmet outo ar Prezidant Jackson, mennet ez on d'ho tilojañ, ha dre an Doue peurbadel, henn ober a rin !”*

Siwazh ne zeuas ket a-benn d'o dilojañ, hag ar ger diwezhañ a chomas gant ar vankerion. E 1816 e voe adsavet brientoù Bank ar Stadoù

<sup>4</sup> Kuntell : *Congress*.

<sup>5</sup> Perzheno : *appartiendra*.

<sup>6</sup> Enkil : *récession*.

<sup>7</sup> Kevranneion : *actionnaires*.

Unanet (bank prevez), hag ar vankerion ambilhet gant ar familh Rothschild o devoa rediet ar bolitikerion da godianañ da vat, ha da c'houzañv o raket.

E-pad Brezel an Disrannidigezh (1861-1865) e kellidas Bank Rothschild London Kevreaded an Norzh, tra ma kellide Bank Rothschild Pariz Kengevreaded ar C'hreisteiz, hervez ur frammc'hoari<sup>8</sup> lakaet da dalvezout en Europa e-pad brezelioù Napoleon. An daou strollad bankel, o korvoiñ ar saviad, a zarvenne<sup>9</sup> treuskampioù<sup>10</sup> a 25% betek 36% zoken.

Ar Prezidant Lincoln, hag en devoa komprenet c'hoari ar re Rothschild, a nac'has plegañ da ziktad ar gelliderion europat hag e 1862, dre vouezhiadeg al *Legal Tender Act*, e voe aotreet dezhañ distreiñ da bennad 1 Bonreizh 1787, ha da voullañ ur moneiz disammet diouzh ur c'hampi da dalañ d'ar vankerion : an dollaroù *“Green Back”*, anvet evel-se dre ma oant moulet gant liv gwer. Evel-se en deus gallet paeañ soudarded an Unaniezh hep kreskiñ dleoù ar Stad.

Bez' e skrive : *“Mac'homet e vez ar Vroad gant Galloud ar gelliderion pa ren ar peoc'h hag e iriennont a-enep dezhi pa vez trubuilhoù. [...] Bez' e vez flatret gantañ oc'h ober enebourion eus ar bobl an holl re o deus disfiziañs ouzh e hentennoù pe a laka anat e dorfedoù. Daou enebour bras am eus : arme ar c'hreisteiz e-tal din hag ar vankerion en a-dreñv. Ha diwar an daou-se, ez eo ar vankerion va gwashañ enebourion”.*

Sklaer e wele Lincoln pegen noazus e oa evit ur vroad emveliek, pa vez galloudoù estreget ar Stad-kreiz o kaout ar galloud da grouiñ moneiz. Siwazh ne wele ket a-walc'h an dañjer a oa da stourm a enep ar vankerion etrevroadel. Drouklazhet e voe e Washington d'ar 14 a viz Ebrel 1865, gant John Wilkes Booth a dennas en e benn gant e bistolenn, p'edo oc'h arvestiñ ouzh ur pezh-c'hoari, en e logell er Ford's Theater.

Abegoù gwirion marv A. Lincoln ne voent diluziet nepred, daoust ma vez lavaret atav gant an azrevell<sup>11</sup> kefridiel e felle d'e zrouklazher dialañ faezhidigezh Kengevreaded ar C'hreisteiz. E warlerc'hiad, Andrew Johnson, ne

<sup>8</sup> Frammc'hoari : *scénario*.

<sup>9</sup> Darvennout : *exiger*.

<sup>10</sup> Treuskampioù : *intérêts usuraires*.

<sup>11</sup> Azrevell : *version*.

hañval ket bezañ bet arvar evitañ war gwir abeg marv e ziagentour : kerkent, hag hep reiñ displegadurioù en deus paouezet gant moulladur ar *Greenbacks* hag ar Stadoù Unanet a zo deuet en-dro da voneiz-dle ar vankerion. Kefridielaet e voe e zisentez gant ar C'huntell d'an 12 a viz Ebrel 1866 dre vouezhiadeg ar *Contraction Act* a resize e vije lamet tamm ha tamm bilhedoù *greenback* Lincoln diouzh amred ar moneiz.

Bez' e oa un nouez-den all, ha n'en devoa ket, eñv ivez, arvar ebet war dirgelaozourion<sup>12</sup> an drouklazh sevenet gant Booth, Otto von Bismark e oa, kanseller Prusia abaoe 1862 hag a skrive : *Marv Linkoln a voe ur gwallreuz evit ar Gristenelezh. Er Stadoù Unanet a-bezh, ne oa den ebet a gement a zelleze zoken da zougen e heuzoù. Aon am eus e vefe mestroniet penn-da-benn pinvidigezh fonnus Amerika gant ar vankerion estren ha na vefe arveret reizhiadeg ganto a-benn breinañ ar sevenadurezh arnevez. Ne dermint ket da stlepel ar Stadoù kristen er brezelioù hag er rouestl a-benn dont da vezañ hêrezhourion an douar a-bezh.* Komzoù un diouganer a zoare, me 'laka !

E-pad ur c'hantved e voe tavet war geal un adaoz nevez eus ar moneiz amerikat, betek ma teuas ar prezidant John Kennedy. D'ar 4 a viz Mezheven 1963 e sine an *Executive Order* niv. 11110 maz adkave drezañ ar Gouarnamant ur galloud enskrivet er Vonreizh, da lavarout eo : an hini da grouiñ e voneiz hep tremen dre ar *Federale Reserve*. Ar moneiz nevez-se, gouestlet war miradoù aour hag arc'hant an Teñzor a zegoune bilhedoù *greenback* ha taol nerzh ar Prezidant Lincoln.

Muioc'h eget-se, drouklazh John Kennedy d'ar 26 a viz Du 1963 e Dallas, pemp miz war-lerc'h e adaoz moneizel, a zegase da soñj drouklazh Lincoln. Bezant e oa an dougad<sup>13</sup> ; divent e oa heuliadoù an *Executive Order* niv. 11110. Gant un tenn pluenn edo John Fitzgerald Kennedy war-nes lakaat er-maez ar c'hoari razh ar galloud kemeret e gaou gant bankoù prevez ar FED abaoe 1816 ha ma piaouent ent-kefridiel abaoe 1913. Ar moneiz nevez-mañ en dije digresket kalz endleadur ar Stad, peogwir e raske ent-emgefreak paeamant ar c'hampi d'ar bankoù.

N'eo ket bet degaset un displegadur kredus gant an danevell Warren war drouklazh ar Prezidant

<sup>12</sup> Dirgelaozour : *commanditaire*,

<sup>13</sup> Dougad : *mobile (qui pousse à l'action)*.

Kennedy. N'eus ket ezhomm da vezañ un den a wel iriennoù e pep lec'h, evit bezañ diskredik war wirionded an dezenn gefridiel ; neket hepken en abeg d'un dielfennadur fall eus amplegadoù ar muntr, hogen dreist-holl dre maz eo marv an holl destoù war-dro an afer-se goude daou vloaz, ha steuziadur pe andishadur un toullad tud e darempred, zoken a-bell, gant an darvoud, evel koskor mezegel an ospital Parkow e-lec'h ma voe degemeret John Kennedy, ha tud nes da Lee Harvey Oswald, an tenner tamallet. Tenn eo krediñ e vije bet kement-se holl frouezh an dargouezhoù. Bez' ez eus bet kentoc'h iriennion c'halloudek o kenderc'hel o reuz, pell amzer c'hoazh da c'houde an drouklazh kentañ. E-touez ar roudennoù lies kinniget gant an eil re hag ar re all, e oa ar roudenn voneizel. Nebeut imbourc'het e voe e derou an enklask, koulskoude, evit tud zo, ez eo seul vui gwiriek ma vez dezrevellet ganto ur frazenn a-berzh tad ar Prezidant, Joseph Kennedy, rak pa ouezas divizadenn voneizel e vab en dije lavaret : *"If you do it, they will kill you"* (Mar grez an dra-se, da lazhañ a rint).

Ur wech c'hoazh e hañval ar c'houzavadenn bezañ bet degemeret pemp war pemp, gant an Is-Prezidant Lyndon B. Johnson, deuet da vezañ Prezidant dre c'hras an drouklazh-se. Evel ar Johnson all, Andrew, ur c'hantved a-raok, gant un herrder heverk a-walc'h e harzas an divizadenn voneizel kemeret d'ar 4 a viz Mezheven 1963 gant ar Prezidant drouklazhet, pa ne oa ket yen c'hoazh e gelan. *"Lamet eo bet an executive order 11110, gant ar Prezidant Lyndon B. Johnson, p'edo er c'harr-nij "AirForce One", etre Dallas ha Washington, dres d'an hevelep deiz goude drouklazh John Kennedy"* a skrivas ur c'helaouenner. Koulskoude ne oa ket reizh-rik an haeradenn-mañ : n'eo ket bet lamet ent-kefridiel an deved<sup>14</sup>, harzet e voe hepken an aotre da voullañ bilhedoù nevez ha skeiñ pezhioù moneiz nevez.

Marteze e oa an drouklazh-mañ ur gouzav d'ar prezidantoù da zont a fellfe dezho dispenn roudoù Abraham Lincoln ha John Kennedy, ha dioueriñ ar vankerion diouzh o leve en ur desteuziañ<sup>15</sup> reizhiad ar moneiz-dle. Degounet e vez gant Eustace Mullins, en e levr *Les secrets de la Réserve Fédérale*<sup>16</sup>, e voe drouklazhet ivez ar Prezidant Abraham Garfield d'an 2 a viz

<sup>14</sup> Deved : *décrot*.

<sup>15</sup> Desteuziañ : *supprimer*.

<sup>16</sup> Troidigezh c'hallek, Le Retour aux Sources Editions, Paris, 2010.

Gouhere 1881, goude bezañ bet graet un diskleriadur war kudennoù ar moneiz. Setu un toullad kendegouezhoù avat !

Abaoe drouklazh ar Prezidant Kennedy, hini ebet eus e warlerc'hidi n'en deus kredet degas an disterañ adaoz da arc'helerezh ar *FED*. Kendalc'h et o deus dleoù ar Stadoù da greskiñ, hag a-feur ma kreskont e pinvidika ar vankerion, ha war un dro o galloud war ar bed, pezh a zo grevusoc'h c'hoazh.

En abeg d'an enkadenn gellidel-bed ha d'an dilennadeg evit ar prezidant gall nevez ez eus

bet komzet kalz eus ar bankoù hag eus ar vankerion, ha tabutet war o divoud, setu perak em eus soñjet e vefe mat studiañ, pe d'an nebeutañ reiñ un alberzh eus arc'hwelerezh kenniñvel<sup>17</sup> bed ar c'hellid en ur vro, Stadoù Unanet Amerika, tebet bezañ pimpatrom ar gevalaouriezh.

**Donwal Gwenvenez**

<sup>17</sup> Kenniñvel : *conflictuel*.

## Prederiadennoù diwar lenn

### Levr Romano Amerio

A-douez an holl levrioù am eus bet lennet betek-henn war Vatikan II, hini Romano Amerio (*Iota Unum*, Riccardo Ricciardi Editore, Milano, 1985 ; troidigezh c'hallek en *Nouvelles Éditions Latines*) a zo an hini skiantelañ e zoare, moarvat. Skiantel : da lavarout eo ne aotre dezhañ e-unan tizhout e bal nemet gant binviji gorrek, luziet un tamm, met asuroc'h eget an hentoù prim ha temptus. Setu emañ Romano Amerio e-touez ar re a soñj dezho eo brein ar marevezh diangoursenedel, met en e zastumad prouennoù a ro d'e vennozh ne raio meneg ebet neuze eus diskuliadurioù prevez evel re Fatima pe La Sallette, meneg ebet eus stourm-enebiñ an aotrou 'n abad Lefebvre ha re zamheñvel. An dazont (dazont an Iliz) n'eo ket bleinek kennebeut e labour-kompren an oberer : a-walc'h ez eus dija evitañ gant an amzer-vremañ, hag e diwezh a levr ne ginniger d'al lenner nemet un dibab etre div pe deir rakweladenn dilorc'h. Peseurt danvez-krai a chom neuze evit un oberenn a c'hourbann bezañ ur studiadenn klok-skolveurel war *Kemmouigoù an Iliz Katolik en XXvet kantved* ? Netra estreget restadennoù ha darvoudoù ofisiel-mat, sklerijennet a-wechoù gant ur poellad eus ar skrivagner war ur frazenn eus ar Skritur sakr.

Gwir, ur pezh luziatez, ur c'hoari-mikado ez eus ag ar goursened ez-istorel. Gouzout a reer penaos, dre un torr-lezenn a-fed gwir kanonek, eo bet taolet d'ar blotoù tri bloavezhiaed labour-prientiñ, en abadenn gentañ ar goursened (e-touez al labourioù-se ar c'henreizhadur *Veterum Sapientia*, ankounac'haet penn-da-benn hiziv), ken ez eo aet war-raok ar goursened goude-se en

un doare dibrientet, "emren", dirakweladus. Hag un istorour gantañ testennoù ofisiel hepken ar goursened ne c'hallfe ket rakwelout an holl gemmoù ramzel deut ingal e pep lec'h da heul - kemmoù graet dalc'hmat en anv ar goursened koulskoude. *Ur fed a-bouez : daoust ma voe krouet evel boaz ur c'hengor evit displegañ an doare mat da gompren dekredoù ar goursened, ar c'hengor-se n'en deus biskoazh embannet netra ha ne vez meneget morse gant an dud diniver a vreuta diwar-benn ar goursened.* (§48) Iriennoù ha kemmoù souezhus a zo bet a-viskoazh e Istor an Iliz, moarvat, met Vatikan II eo ar goursened kentañ a vez breutaet c'hoazh war e ster, e "spered", hanter-kant vloaz goude.

*"Hag ar relijion ? Disheñvel krenn ivez an doare ober ganti. War ziskar e ya, a lavar lod. Dounnoh dounna em zil er galon, a lavar lod all",* a skrive an Tad Medar en *Tri Aotrou*. Youenn Olier a skrive er C'hannadig-mañ ez aio da get didrouz ar gatoliged evel ma oa aet da get kristenion ar Magreb, peogwir n'en em vezont mui evel tud disheñvel. Ha pouezañ a reont evit na bezañ disheñvel, a ouzhpennfen-me : gwelit ar gedilizouriezh a hiziv... Romano Amerio a verk e § 325 al levr ez eo heñvel-mik an ersav-se ouzh hini ar baganiezh war he zalaroù : arguzenn ziwezhañ ar baganed kent steuziañ (en o zouez ar prefed Simakus anavezet) a oa e ranked lezel ur plas d'ar relijion bagan peogwir e oa kevatal mui-pe-vui an holl relijionoù... rik arguzenn ar gatoliged kedilizourion hiziv ! An dud a zouj muioc'h d'an anv, d'ar ger, d'ar paper koulskoude eget d'ar boud, hag evel ma lavar Chesterton, "An dud a c'hall gouzañv ar poanioù spontusañ pe an torfedoù euzhusañ ken pell ha ma karer, gant ma vo kuzhet outo... Yann

labourer a zo laouen da vezañ korvoet betek kreiz e eskern, ne c'houzañv ket avat e vefe lavaret dezhañ eo korvoet. Zoken an dud laoskañ ha blotañ a zarsavo kerkent ha ma vo dievezh a-walc'h ur groñsrener evit gwanaat e grog war ar vrud". Ha neuze, an holl gatoliged ken laouen da gendeuziñ er relijion gedilizour hollvedel a zalc'h start koulskoude d'an anv ha d'ar vrud katolik. Bec'h dezhi neuze gant an holl levrioù katoligiezh-evit-touristed ha me 'oar me... Evel ma skriv Amerio, biskoazh n'eus bet kement a levrioù-speredelezh war an Eukarist evel hiziv, ha biskoazh ivez n'eus bet ken nebeut a zoujañs ouzh an Eukarist : aet eo da get azeulerezh an ostivoù (§ 486), an oferenn n'eo mui nemet ur pred, o vont da ziduamant zoken : er Stadoù-Unanet e kaver bremañ ostivoù e stumm gwestell sukret, oferenoù gant merc'hed yaouank o tañsal da skouer. E rannbennad XXXVII al levr e vez studiet pizh-pizh an nevezentioù ingalañ en oferenn nevez.

Heñvel evit ar Bablezh : hiziv ma'z eus pop stars evel ar re all eus ar Bibion ( ha tro em eus bet da glevout gant ma divskouarn bev ez eo o c'hudennoùigoù-yec'hed (evel re Johnny Hallyday pe Madonna) dafar da gaozioù aketus e-touez al lennerion magazinoù), e skriv R. A. er § 327 : "*Digreskiñ a ra aotrouniezh ar Bibion tizh-ha-tizh e gwirionez, da gentañ-holl abalamour d'ar feiz o wanaat e pep lec'h, met ivez abalamour da souzerezh ar Bibion a hiziv, ur souzerezh neket dre evezh pe dre zegouezh evel a-raok, met unan reizhiadek, ingal, dirak disentidigezh an eskibion da skouer*".

Meneget e vez ivez gant Amerio penaos ur c'houlennadeg e Roma e 1981 ne roe nemet 22% eus an dud a-enep d'ar sioc'hanerezh.

Souezhusat tra : an neuz, ar vrud, al liv katolik arveret evel digarez, evel maskl da na bezañ katolik ! Al lavar katolik blejet kreñvoc'h evit na glevout anezhañ. Ar gwir a zo gant R. A. moarvat pa veneg er gendestenn-se Mazhev 13:13-15, diwar-benn an diskouarn na glevont ket, hag an daoulagad na welont ket. E kentelioù skiantoù an natur ar skol a hiziv e rank ar skolidi boemiñ ouzh ijin an dimezell Natur evit lakaat ar vuhez da vont en-dro, an daoulagad da welout ha me oar 'me. Ma, frouezhusoc'h (met diaesoc'h moarvat) e vefe er marevezh a-vremañ boemiñ ha prederiañ war burzhud al lagad na wel ket, e-lec'h war burzhud al lagad a wel.

Barrek eo R.A. ivez da vreutaat diwar-benn traoù a glevet dec'h digant enebourion an Iliz

hag a groger da glevout en Iliz a hiziv : "*Hiziv emañ ar c'hiz ober fae war istor politikel an Iliz, hag ivez meuliñ an Iliz "kentañ", a vefe un tebet kumuniezh peurvrat, ur gumuniezh a Sent, ur skwer da heuliañ dre ret. Iliz ar c'hantvedoù kentañ a oa ur meskaj ramzel a winizh hag a ed-du, e gwirionez, evel hini hiziv (...)* E skridoù Sant Paol dija e kaver meneg eus ar brezelachoù trist a lousae unanded an Iliz. En trede kantved g.H.S., Sant Siprian a zezrevell penaos kerkent ha m'en devoe an enebour distaget ur ger *gourdrouzus pe zaou, e rede dija an darn vuiañ eus ar fideled da renaviañ ar C'hrist ez-foran, a-raok zoken bezañ paket*" (er § 57).

Ar rannbennadoù XXVIII, XXIX ha XXX a zo gouestlet d'an divez en Iliz diangoursenedel. Keal ar varnedigezh evel sammad, evel keitenn an oberoù mat ha fall, eztaolet mui-pe-vui e Daniel V:27 da skouer, ne veze degemeret en Iliz a gent nemet gant kalz evezh, abalamour d'ar riskl a zo er c'heal-se da sellout ouzh pep ober drezañ e-unan evel netra, peogwir n'eus nemet ar "geitenn" a gont : an digarez peurvrat evit pec'hiñ didrabas neketa... Gwelloc'h e kave an Iliz kelenn e vez barnet an dud "diouzh o stad rik d'ar mare ma varvont", hag ar stad-se a rank moarvat jaojañ ar geitenn. En Iliz diangoursenedel e vez adkemeret keal fall ar "geitenn", pa ne vez ket gwashaet gant keal ar "volontez vat" a vefe an dra nemetañ da varn e pep ober. Diverraet mat an traoù gant Joe Sobran, "er gatoligiezh a-vremañ e vez roet da Yann Pec'her kement a c'hoursezioù hag a eilvet-chañsoù ma kar".

Ar rannbennadoù XII ha XIII a bled gant ar c'hemmoù degaset er skoliata hag er c'helenn. Er par-se eo heñvel ar pezh a c'hoarvez er skolioù kristen hag er re zigristen : argas an deskiñ-dre-ñvor, brezel ouzh labour ar striv-derc'hel-soñj (padal "*N'eus ket a ouizidigezh hep ñvor*", a verk R.A.) , arrizhelouriezh an arnodiñ ("*Arnodiñ gant lezenn Doue ne c'haller ket*", eme Amerio, "*sentiñ outi pe terriñ anezhi nemetken*." ) Ankounac'haet eo bet penn-da-benn an diforc'h graet gant Sant Eosten e *Keodad Doue*, XXII, 30, 4 : "*Daou zoare ez eus da anavezout ar poanioù, hini ar poell a zo mestr warno, hag hini ar skiantoù a c'houzañv anezho. Ar furnez hag ar vuhez direol ne anavezont ket ar pec'hedoù en hevelep doare.*" Er § 129 e vez restet ivez ar chaloni Fransesco Chiesa : "*Arabat deoc'h lavarout : ret eo bezañ e-barzh. Traoù 'zo a vez anavezet gwelloc'h eus an diavaez.*" Ar sofisterezh-se a vez disgwiriet ivez en un doare



damheñvel er ganenn rock mil anavezet, *The Carpet Crawlers* : enni *The carpet crawlers heed their callers* (ar re en em stlej war ar pallennoù-leur a selaou o mistri gant aked), ha galv ar vistri-se a zo diskan ar ganaouenn : “*You gotta get in to get out*” (Evit mont maez e rankit mont e-barzh da gentañ)

Er §306 : “*Grit dezhañ mervel gant emskiant, Sientat se mori : an urzh-se, a veze roet gant Kaligula d'ar jahinerion dindanañ a oa krizentez-uhel er bed pagan. Er bed kristen eo deut da vezañ ur gourc'hemenn divezel hag ur c'hras deroet gant Doue. (...) Ur c'hemm heverk a-walc'h a zo c'hoarvezet e bred tud hor c'hantved er par-se. Keal ar marv a zo displijustre dezho, hag argas a reont forzh pe skeudenn, forzh pe soñj, stag ouzh ar marv (...) Ar mennad da ober eus ar marv un ober a asantidigezh a zo bet ezlec'hiet gant ar mennad da vervel ez-diemskiant. Ar pezh a oa ur c'hastiz euzhus evit ar Sent en o c'hlemmganoù a zo bremañ un dra a vez klasket ha kavet gant an dud, en emlazh diaerezet gant sikour ar vezeion. Gwechall e c'houlenned : “Ha gallet en deus resev ar sakramantoù diwezhañ ? Ha kofeset en deus ? Ha pardonet en deus ?” Hiziv e c'houlenner : “Hag hir eo bet ? Ha gouzañvet en deus ?” (...) Pa soñjas da vezeion Loeiz XIII e oa war-nes mervel, e tihunjont anezhañ hag e c'halyjont e gofeser (...) Pius XI en doa diskleriet d'e maestro di Camera, an aotrou abad Arborio, e c'hoantae mervel all'improvista. Hag ar Pab a bede Sant Andrev Avellino evit ma vefe deroet ar c'hras-se dezhañ. Iskis eo, peogwir eo brudet ar sant-se evit bezañ mat a-enep d'an taol-gwad empenn dreist-holl. Iskis ivez ar reizhabegadenn a roe d'an deoliezh-se, e respont da enebadennoù an aotrou abad Arborio : hervez ar Pab e ranke ur c'hristen bezañ prientet pep tra evit ar marv ken n'en doa mui ezhomm soñjal ennañ. Iskis eo, emezomp, rak un ober ez eus eus ar marv, ha prientiñ a reer an ober-se, ne c'haller ket prientiñ evit na ober”.*

Gwir, pep kristen a zo galvet da vezañ un *alter Christus*, hag ar gravez kristen ne vefe ket anezhi keneve da zaou vurzhud : da gentañ asant Mari d'ar goulenn degaset gant an arc'hael Gabriel, ha da eil, asant (poanius) Jezuz betek an diwezh war ar groaz. Betek an eilenn ziwezhañ e c'helle an den-Doue kas an holl dud da sutal hag em zieubiñ dre ur burzhud bennak ; gwelloc'h eo bet gantañ c'hoari e roll denel betek penn, peadra da vezañ ur skwer heuliadus gant kement den 'zo.

An arrouden-se en doa ma lakaet da soñjal e lod breutadegoù kristen-muslimat. Ar Vuslimiz a zo digenvezet eus peurrest an hollved gant o c'hredenn e Jezuz a-unan gant ar gredenn n'eo bet biskoazh kroazstaget. Diazezet eo ar gredenn heverk-se war lod arroudoù eus ar C'horan evel 4:156 : *Ha mallozhet hon eus anezho (ar Yuzevion) abalamour d'o difeiz, hag abalamour d'ar gevier vil o deus strewet war Mari.*

4:157 : *Hag abalamour m'o deus lavaret, stad enno : “Lazhet hon eus Jezuz, ar Mesiaz, mab Mari, kannad Doue”, pa n'o deus ket lazhet anezhañ, pa n'o deus ket kroazstaget anezhañ : un touellwel ne voe ken evito... Hag ar re na gredont ket er wirionez war ar c'hraf-se a zo kollet er martezeadennoù, n'o deus anaoudegezh asur ebet. Lazhet Jezuz n'o deus ket, a dra sur.*

4:158 *Doue avat en deus adsachet anezhañ davetañ. Klod da Zoue hollc'halloudek hag hollouziek !*

Bewech ma soñjan en arroud-se n'on ket evit herzel war ma zech da welout ennañ mennozhioù katolik-kenañ, evel dallentez ar Yuzevion a oa o seveniñ diouganou an Testamant Kozh gant ar brasañ aked hag ur sentidigezh rik, d'ar mare ma krede dezho bezañ mistri war an den-Doue hag em laouenaat diwar e goust. N'eus Muslimad ebet a gompren an arroud-se er C'horan evel ma ran, evel-just. Kredañ a ra ar Vuslimiz e vefe bet lakaet unan bennak all war ar groaz e-lec'h Jezuz, dic'houzvez d'ar Yuzevion. N'eus ket a unvaniezh avat en Islam evit lavarout piv a zo bet kroazstaget en e lec'h : Judaz Iskariot hervez lod kaer, ur Yuzev anvet Titavus hervez lod all, un diskibl da Jezuz hervez lod all c'hoazh... ha me gant ma zechoù fall adarre, a lavar penaos ar Vuslimiz *ne gredont ket er wirionez war ar c'hraf-se a zo kollet er martezeadennoù, n'o deus anaoudegezh asur ebet* (hervez ar Vuslimiz e talvez ar meneg-se er C'horan evit ar Yuzevion, na ouie mui peseurt gaou ijinañ dirak ar wirionez oc'h en em ledañ).

Ha kalz traoù all ez eus ivez e levr Romano Amerio, istor ar sioc'hanerezh, bet ganet amenet, ha pennfollet ha troet da varanegezh enep-skiantel hag enep-relijiel gant an amzer (rannbennad XXVI), Paol VI o kompren parabolenn Lazar hag an den pinvidik war an tu gin (§ 328), an demokratelezh en Iliz (rannbennad XXXIII), he deus pulluc'het galloud an eskibion hag a ra d'an aotrou 'n abad Vonderach lavaret da skouer, “*Evel eskob er-*

maez eus ma c'humuniez e eskobel ez on dic'halloud a-grenn" (er §61), ar gedilizouriezh (rannbennad XXXV), ar brezel (rannbennad XXVII), al lidoù nevez (rannbennad XXXVIII)

... An darn vrasañ eus an titouroù e *Iota Unum* a vefe diaes da gavout e-lec'h all, da'm soñj.

**Ewan Delanoy**

## An daouarn naet

"Souezhet edo ar Farizianed o welout n'en doa ket gwalc'het e zaouarn a-raok ar pred." (Lk 11, 38).

Kent an Emzenadur e oa douget Israeliz da ginnig madoù danvezel da Zoue. Ar bobl avat, e levr Mic'ha, a c'houlenn : "Petra a vo ganin paz in dirazoc'h, Aotrou, pa zeuin d'hoc'h azeuliñ ? Gant ul loskaberzh ? Gant ul leue-bloaz ? Peseurt dudi a dennfes-te eus tourzed a-viliadoù ? Gant eoul ha froudoù ? Ha droukreiñ a rin va mab, frouezhenn va c'horf ?" (Mi. 6,6)

Hogen an diouganer e-unan a eilger e tistaol Yawe ar gouloc'h-se 18 . Didalvoud eo ur gouloc'h evitañ pa ne drid ket er galon ar yonez hag ar garantez. Bale a ranker, uvel, gant an Aotrou. An hent izelek-se da heul an Aotrou ne c'hell ket bezañ, e doare ebet, ur golo-pod, ur maskl, ur c'hroc'hen nemetken.

Anat eo ned eo ket a-walc'h ar furlouriezh. Anezhañ e-unan ez eo didalvoud ar gouloc'h diavaez : aberzhioù, gant un doug diabarzh ez eo ar pezh a c'hortoz ar Peurbad. A-raok donedigezh ar C'hrist e oa kentoc'h an diavaez an hini a gonte avat : al Lezenn, an amdroc'h, an aberzhoù-chatal, kinnigoù ar vugale nevez-ganet, ar preveudioù, an deog war an arc'hant, ar bara, an ezañs... Er pevare kantved, e prezego ar manac'h Makarioz evel-henn : "Hogen, abaoe maz eo en em ziskouezet Lavar salvus ar C'hrist e kalon an dud, ar Spered Glan, ar Gomz ha n'eo ket skrivet gant liv, pep tra a zo er c'hreiz. Er c'hreiz emañ ar gouloc'h, dont a ra eus un askre glan. Er c'hreiz emañ an aberzhoù emañ Doue o klask. En ur ger emañ o klask ar yac'honi diabarzh ha kinkladurezh an eneñv. Evel-se neuze e c'hell an diavaez bezañ glan e gwirionez".

Splann eo ez eo penndalc'hel<sup>19</sup> an diabarzh, ar vuhez-ene, dindan an Emglev Nevez, hon hini-deomp-ni. Hadet eo al Lavar er c'halon, ha n'eo war ar c'hrec'hin. Ha bez' e c'heller lavarout zoken ez eo Jezuz kentoc'h greun eget hader. Ne fell ket dezhañ chom war-c'horre, hogen e-kreiz

ar c'halon (Mzh 13, 18-25). Pal speredel hor buhez eo mont-tre en hon ene, e-lec'h m'emañ o chom an Ostiz douevel. Diogelet eo gant S. Paol d'ar Gorintidi : "Hoc'h izili a zo Neved ar Santelañ a ra e annez ennoc'h" (1 Kor. 6, 19). Egiz-se ivez e kelenn ar Mestr : "Chomit ennon ha me ennoc'h" (1 Yn 1, 3). Bevañ en diabarzh a zo bevañ hervez tro-lavar S. Yann "kevredet" gant an Teir Nouez (1 Yn 1, 3). Boutin eo o buhez gant hon hini. Ya ! Eno emañ ar vuhez kantaezouezel<sup>20</sup>.

Ar santelezh a zo kenvevañ gant an Tri "en diabarzh" n'eus strad ebet dezhañ. An neñvig-se ez eo Doue Jezuz Krist ar greizenn anezhañ. E glask ha dreist-holl chom ennañ a zo da ober. Lavarout a reer diwar-benn Santez Katell a Sienna e veve dalc'hmat en ur c'hell, daoust dezhi bevañ soubet er bed. Ivez e kelenn S. Frañsez evel-henn : "E-lec'h klask kravez ha santelezh diabarzh ar spered e vez troet an dud gant ur gravez ha gant ur santelezh diavaez hewel mat ouzh daoulagad an dud<sup>21</sup>. Diwar o fenn e lavar an Aotrou : "E-gwirionez, o deus bet o gopr". (Mzh 6, 21).

Displegañ a ra an den gwenvidik Anton Chevrier (1879) : "Bepred e welomp ar C'hrist oc'h ober war-dro stummadur diabarzh an Ebestel. E diazezidigezh an Iliz ne ra an Aotrou gant harp diavaez ebet."

Ha Mari, Mari a zo ar Werc'hez feal, hi eo "an hini a vire pep tra en he c'halon" (Lk 8/51). En Neved, en em zalc'he bihan hag embrederiek dirak Doue ; e sioulded ar santual-se, e sache warni an dudi a gave enni an Drielezh Santel. Ha resizañ a ra Santez Elesbed an Dreinded ez eo e-kreiz darvoudoù an Degemenn hag ar C'hinivelezh ez eo ar Werc'hez skouer an eneoù

<sup>20</sup> Kantaezouezel : *contemplatif*.

<sup>21</sup> Mat e oa ar c'homzoù-se a-berzh St Frañsez evit kevredigezh e amzer, pe c'hoazh evit hor c'hevredigezh c'hwegont vloaz zo, pa oa kristen 95% eus ar boblañs e Breizh, hogen hiziv maz a hor c'hevredigezh war zigristenaat buan e vefe ret, e-gin-kaer, diskouez, hep mezh na kemplezh, muioc'h a sinoù diavaez evit haeriñ ez omp kristen M. Alcader, en e levr "Dremm gwirion an Islam" a gomz eus ur vuuslimadez he devoa lavaret dezhañ e touge ar ouel islamek, neket evit sentiñ ouzh he gwaz, hogen evit diskouez sklaer bezañs an Islam e Bro-C'hall. *No comment ! (Notenn gant Yann Mikael)*.

<sup>18</sup> Gouloc'h : *culte*.

<sup>19</sup> Penndalc'hel : *essentiel*.

don dibabet gant Doue evit bevañ enno gwitibunan, evel en islonkoù distrad.

Kredomp start e retvez didec'hus ar vuhez diabarzh. Jezuz ne vihana morse e bedennoù nag evezh ouzhimp. An den a-hiziv avat a dremen un tamm mat a amzer war-dro e "look" diavaez : ar blev, ar gizioù, ar c'harr-tan... Er skinwel, d'ar c'houlz-mañ, e pouez start an darañverezh war ar

c'hirri, an traetoù hag al lunedoù. Da lavarout eo ar pezh a laka an dudenn da skediñ : gwelaat ar plusk, ar gwernis, ar greun. Miromp mat hor buhez-ene diabarzh eta, a venn ar bed skrapañ diganimp.

**Youenn Troal**

## Keleier berr ha berr, bras, bihan ha dister

**Kañvoù :** d'ar sadorn 3 a viz Meurzh eo bet beziet **Pêr-Felis Kefelean**, eus Landeda, bet koumanantet da Imbourc'h, e bered Sant-Marzhin Brest.

E Roazhon d'an 8 a viz Genver ez eo aet da anaon **Annaig Renault**, skrivagnerez brezhonek bet ganet e 1946.

**Obererezhioù EAT.** Kalzik raktresoù ez eus war ar stern met ar vicherourien eo a ra diouer : a-bep seurt labourioù bihan ha bras evit an holl dud a volontez vat ! **Kannadig Imbourc'h** : ouzhpenn an adkoumanantoù e vefemp laouen o tegemer kenlabourerien nevez, muioc'h a lizhiri hag a bennadoù a bep seurt, evit an holl. Kontadennoù berr, barzhonegoù, keleier, embannoù ganedigezhioù, euredoù ha kañvoù hag all. Ur benveg d'ober al liamm etre an izili eo "Kannadig Imbourc'h".

**Mision 2012 :** Goulennet en deus eskob Kemper ma vefe studiet Aviel Sant Yann gant an holl dud a volontez vat en e eskopti. Graet eo bet gant lod izili eus EAT. N'eo ket diaes da aozañ : bep miz en em gaver e ti unan bennak, e vez lennet ur pennad eus Aviel Sant Yann, ha da heul ur pennad sioul e komz an dud diwar-benn an destenn. Un dro vat da zonaat hor feiz ha da stankaat an darempredoù etre ar gristenien vrezhonegerien.

**Kamp Katekiz 2013 :** goulenn a ra familhoù 'zo e vefe ur c'hamp katekiz e brezhoneg e-pad ehanoù an hañv. Klask a reer eta tud a youl vat hervez o donezonoù : BAFD, BAFA, keginerezed, evezhierien, katekizerien, ur beleg hag ul lec'h da ober kement-se !... Piv a c'hell kregiñ e-barzh ?

**Levr Katekiz :** krog eur ivez da dreiñ ur c'hatekiz e brezhoneg, diazezet war hini Quinet, holl anavezet evit e gelennadurezh sklaer, ennañ liveoù disheñvel, hervez an oad : bihan, krennard, ha gour. Klask a reomp tud da gemer perzh el labour-se a zo kroget mat (labour treiñ, bizskripañ, pajennaosañ). Un doare mat eo da studiañ ar feiz hag ar brezhoneg war-un-dro.

**Liderezh an Euriou :** an eil levrenn a zo prest, koulz lavaret, gant Paol Kalvez. Gourc'hemenoù dezhañ ! 1944 pajennad ez eus. Klask a reomp un donezon vras a-benn gellout moulañ an eil levrenn-

mañ. Al levrenn gentañ he doa koustet war-dro 20.000 euro !!...

**Levr-Oferenn "Oferenn ar Sul" :** Roma he deus goulennet un nebeut kemmoù a-benn reiñ he recognitio. N'eo ket re ziwelzhat c'hoazh eta kas evezhiadennoù d'ar gomision etreeskoptiel pe da EAT, dreist-holl e par ar yezh (ur bern vioù koukoug ha kudennoù reizhskrivañ ez eus a-hent-all a vo reizhet ivez), diwar lenn levr-overenn Minihi Levenez 1997, pe an doare treuzskrivet er skritur unvan : « Oferenn ar Sul » 642 p. Eost 2011 (sellout ouzh niv. 73 ar c'hannadig) .

**Bibl brezhonek :** Anv ez eus da brientiñ moulladur ur Bibl kristen klok evit ar brezhoneg. Kembreiz o deus unan evel-se abaoe pell-tre, da vihanañ abaoe 1977, « Yr Beibl Cysegr-Lân ». Diazezet e vo al labour hir-mañ war skridoù skipailh « Ar Bibl Santel » Maodez Glanndour a oa bet moulet un tamm anezhañ gant Al Liamm. Klask a reomp kenlabourerion, paneveken evit al labour bizskripañ eus an dornskridoù diembann.

**Notennoù Politikel Youenn Olier :** n'hon eus resevet keloù ebet evit pezh a sell ouzh ar raktres da adembann e bennadoù pouezusañ. Daoust da se ez eo un dra a-bouez da gas da benn mat ivez.

**Levraoueg EAT :** tu ez eus da luc'heilañ ha zoken da brestañ levrioù, kelaouennoù ha dielloù, war divizoù 'zo. Ne vez ket implijet a-walc'h hol levraoueg. Dont e darempred gant EAT.

**Embannadurioù Imbourc'h :** emañ roll hon embannadurioù war hol lec'hienn. A-walc'h eo goulenn evit resev ar c'hatalog moulet war baper. Prenañ ha lenn oberennoù a zo un doare mat da sikour eveljust, hogen ivez ha dreist-holl da studiañ dre ar brezhoneg.

**Tro-Breizh :** Evel bep bloaz e vo izili eus EAT oc'h ober an Dro Vreizh, ar bloaz-mañ etre Sant-Brieg Sant Maloù aozet gant "Les Chemins du Tro-Breiz". Poent eo lakaat e anv.

**Pastorelezh vreizhek en eskoptioù :** Emañ an Aotrou 'n eskob Centène o paouez embann ul lizher eskobel « **Komunion evit ar Mision**, ur raktres evit ar bastorelezh hag ar mision war dachenn

ar brezhoneg ha sevenadur Breizh. Dont e darempred gant an Tad JP Penhouet [jppenhouet@gmail.com](mailto:jppenhouet@gmail.com)

**E Penn-ar-bed** emañ an **Tad Le Stang**, vikel vras e karg eus ar preder-se daoust ma ne oar ket brezhoneg. [gerardlestang@neuf.fr](mailto:gerardlestang@neuf.fr). Aliañ a reomp eveljust izili EAT da genlabourat gant frammoù an eskoptioù pa c'hellont. EAT ne genlabour ket war-eeun peogwir ne labour ket e galleg ha e vennomp chom emren en ur zoujañ ouzh aotrouniezh an eskibion met o c'houzout mat ez eo gall an Iliz e Breizh.

**Stajoù evit ar vugale**. Keit-ha-keit e lenner brezhoneg ha gallaoueg war dalbenn al levrigbloaz **Kreizennoù vakañsoù/Otieüs de Vacances**. Bep bloaz e vez roet muioc'h-mui a bouez d'ar « gallaoueg », en un doare « mekanikel » evit gwir, dindan levezon un nebeudik-tre a dud oberiant, en UBAPAR, e Kevre Breizh, Dihun, Anna Vreizh 2014, ha, bep sizhun er gelaouenn « YA ! ». Met awalc'h eo digeriñ al levr evit gwelout n'eus nemet 2 gamp aozet gant « Les assemblées gallèses » sañset e gallaoueg, pa 'z eus 42 evit ar brezhoneg. Ouzhpenn-se, eo merket « *n'eo ket ret komz gallaoueg evit kemer perzh er c'hampoù gallaoueg* »... met anv ez eus a ober c'hoariva ganto evelkent ! C'hoariva mut gant yezh ar sinoù moarvat ?! Evit ar stajoù brezhoneg ez eo un tamm mat siriusoc'h « *Ar vugale a rank gouzout tra-walc'h a vrezhoneg evit gellout en em zibab aes* ». Siwazh ez ouzhpenn : « nemet evit ar c'hampoù divyezhek », pezh a dalvez eveljust e vo trec'h ar galleg e-touez ar vugale. Forzh penaos, siwazh-Doue, goude ma vez lakaet ar brezhoneg da yezh nemeti en ur staj bennak, e ouzer mat e vo techet ar vugale d'ober gant ar galleg kenetrezo, nemet evit an oberiantizoù, da lavarout eo en o darempredoù gant an animatourien. Petra 'ri ? !

Da geñver aozidigezh ur c'h/**Carnaval** » e **Landerne e-pad dibenn-sizhun Sul ar Bleunioù** e oa bet peget skritelloù e brezhoneg gant izili eus Emglev An Tiegezhioù da c'houlenn ma ne vefe ket implijet ar ger « Carnaval » evit ur fest e-pad ar C'horaiz, met ur ger all, ha goulenn ouzh ar « skolioù kristen » da chom hep kemer perzh e dibunadeg ar vugale. Anv a zo da begañ c'hoazh

skritelloù brezhonek kristen o deus graet un tamm mat a drouz : dont e darempred ganeomp.

**Karnaval e-pad... dibenn-sizhun Pask en Naoned** ! E penn an dibunadeg e oa ur Gwenn-ha-du. Pebezh trec'hadenn evit an Emsav ! Daoust hag eñ ne soñjo ket an dud eeun emañ tud an Emsav a-du gant ar sevenadur gall a vac'h hengounioù koshañ ar vro-mañ ?

**Niverennoù kozh Barr Heol** : emañ hor mignon ha lenner feal Youenn Grall o klask an niv. 1-2-3: 1955, 19: 1959, 24: 1960, 27: 1961, 42-45: 1965, 51: 1967, 60:1969, 63-64-66:1970, (zoken roget, louedet, melennet, kaoc'h kelien warno) evit klokaat e zastumadeg. Skrivañ d'e chomlec'h : 520 Metropolitan Avenue, Waukegan, 60085 IL USA, pe d'ar gelaouenn a dreuzkaso dezhañ.

**Yvan Guéhennec** : emañ bremañ e gwerzh e levr nevez : "*Histoire des langues celtiques et le début de leur littérature*" (315 pajenn) ; tu zo da breñañ anezhañ e levrdivoù breizhek, Coop Breizh en Orient, Lenn ha Dilenn e Gwened, Gweladenn e Sant-Nazer. Tu zo ivez mont e darempred gant an embanner : Editions Label LN ; 16 rue de Gouranou ; 29 830 Ploudalmezeau ; pell : 02 98 48 14 57 ; [www.editions-label-ln.com](http://www.editions-label-ln.com)

#### **Korvigell un indian Siou bennak moarvat :**

Pa gresk ar vugale e vezont techet da vont war ar galleg evit meur a abeg. Aesoc'h e kavont alies. Ur gorvigell ez eus d'o broudañ da zerc'hel d'ar brezhoneg en o darempredoù ganeoc'h : respont dezho e galleg ivez met o chaokat galleg distagellet ha lu, en un doare fentus ha brasonius, doare daou c'hant vloaz 'zo. Neuze ez eont en dro e brezhoneg, doñjeret ! Marteze hoc'h eus rekipeoù c'hwi ivez da ginnig d'ar C'hannadig : embannet e vint, laouen !

**Adkoumanantoù** : Trugarez vras d'ar re o deus kaset o skodenn adkoumanantiñ evit 2012. D'ar re n'o deus ket graet c'hoazh e tegasomp d'o soñj ez eo 15 € hevlene (18 € er-maez eus ar C'hwec'hkogn). Kresket eo bet un tammig priz ar skodenn en abeg da vizoù ar Post dreist-holl, a gresk dizehan Trugarez deoc'h en a-raok !

#### **Mererezh :**

15 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/kannadig/> (Notit eo bet kemmet chomlec'h lec'hienn EAT-IMBOURC'H)

#### **Skridaozerezh :**

Ar pennadoù a zo da gas da : [jean-mariemichel@neuf.fr](mailto:jean-mariemichel@neuf.fr) , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X